

Anv bihan :

Deiziad :



MUZULIAÑ AN AMZER

Kentel (01)


Evit muzuliañ hag en em lec'hiañ ba'n amzer e c'haller implij :

- War hir amzer : an **deziadur**, an **deziataer**...

- War berr amzer : an **traezher**, ar **c'hronometr**, ar **montr**...



un deziadur



un traezher



un c'hronometr

Evit muzuliañ an amzer é tremen.

...

An unanennoù a amzer :

1 bloaz = 12 miz = 52 sizhun = 365 deiz (pe 366 !...)	1 miz = 30 deiz (a-wechoù 31, pe 28 ha 29)	1 sizhun = 7 deiz	1 deiz = 24 eur	1 eur = 60 munut
--	--	-----------------------------	---------------------------	----------------------------

...

Penaos jediñ unanennoù a amzer ?

Deus ar 1^{añ} a viz Genver d'ar 6 a viz Meurzh :

- Deus ar 1^{añ} a viz Genver d'ar 1^{añ} a viz Meurzh, **2 viz** zo.

- Deus ar 1^{añ} d'ar 6 a viz Meurzh, **5 deiz** zo.

Neuze zo **2 viz ha 5 deiz** deus ar **1^{añ} a viz Genver d'ar 6 a viz Meurzh**.

Genver	C'hwevrer	Meurzh	Ebrel	Mae	Even	Gouere	Eost	Gwengolo	Here	Du	Kerzu
--------	-----------	--------	-------	-----	------	--------	------	----------	------	----	-------

...

Deus al Lun da 8 eur vintin d'ar Gwener da 5 eur abardaez :



- Deus al Lun da 8eur vintin d'ar Gwener da 8eur vintin, **4 deiz** zo.

- D'ar Gwener, deus 8eur vintin da 5eur goude merenn, **9 eur** zo.

Neuze zo **4 deiz ha 9 eur** deus ar **Lun da 8eur vintin d'ar Gwener da 5eur abardaez**.

Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener	Sadorn	Sul
-----	--------	----------	------	--------	--------	-----

8e00 vintin



5e00 abardaez